



TALABAO 17

ar gazetenn a ra trouz!



TALABAO, KAZETENN AR VREZHONEGERIEN YAOUANK
ISSN 0982-8311 - CPPAP 69032



24,00 L

Ur wech e oa e Ledav... PAOL AR MEUR



TALABAO, embannet gant AN HERE
Kazetenn ar vrezhonegerien yaouank
ISSN 0982-8311 - CPPAP 69032



Renet ar gazetenn: Alan DIPODE
© Copyright evit an holl bennadoù
ha tresadennoù gant AN HERE, 1990

Niverenn 17
Miz Ebrel 1990

TAOLENN

Lagad ar Meurzhliad	3	Jorj ar Meur
Kañfarded Koad Kervorvan	4	Brieg ar Menn/Malo ar Menn
Rêves de Gosse	8	Jean-Luc Roudaut ha Radio Breizh-Izel
Indioned ar C'hompezennoù	15	Brieg ar Menn/Malo ar Menn
An torr-penn	27	Herve gKerrain
Kañfarded Koad Kervorvan (2)	28	Brieg ar Menn/Malo ar Menn
Lunelloù ar Gorriganed	32	Daniel Doujet
Biskoazh kement all!	38	Goneri gKersaozon
Korn ar fri-furch	39	Divi gKervella
Eurêka!	39	Tarzhig
Tangram	40	Natacha Nabisa


Maketenniñ ha pajenniñ gant Alan Dipode

LAGAD AR MEURZHIAO

Jorj AR MEUR

MA... SETU AN DEZERZH KOMPEZ
WAR-HED 3 Km... ROC'H EBET,
GWEZENN EBET...

TU ZO DIN DA
LAZHAN AR
GOULEZER...



D'WALLIT!
DEZERZH KOMPEZ
WAR-HED 3 Km





Aourell Bre'han Koupaia Goneri Xeridwenn Tierneg

KOAD KERVORVAN

Savet gant
- Brieg AR MENN
ha treset gant
- Mado AR MENN



HOLA GONER!
SKOAZELL
AC'HANON,
PAOTR LOREEK
AC'HANOUT!

RELECH EMAN
KOUPAIA?
AON 'MEUS
EMAN O
TASTUM MOUAR
BEPRED!





Bugale ar òed

D'ar Sadorn 10 a viz C'hwevrer 1990 e oa c'hoarvezet e Suafrika un darvoud bet gortozet gant milionoù a dud er bed: divac'het e oa bet Nelson Mandela, goude 26 vloaz tremenet a-drek barrinier an apartheid ha bajanegezh mab-den. Dre ma oa gouestlet "Kanevedenn", pladenn ar strollad Rêves de Gosse, da Nelson Mandela hon eus kavet brav embann ur gaoueadenn bet skinembannet gant RBI da-geñver ganedigezh ar bladenn

ETREWELADENN

Sten *Setu a-benn ar fin deuet er-maez kentañ pladenn 33 zro Rêves de Gosse - ur c'hasedig e oa an hini gentañ. Evit ober gwelloc'h anaoudegezh gant Jean-Luc Roudaut hag ar strollad Rêves de Gosse em eus goulennet digant bugale skolaj Roparz Hemon Diwan e Brest ober un nebeud goulennoù ouzh Jean-Luc.*

Katell *Da be oad 'peus kroget gant ar sonerezh?*

Jean-luc Roudaut *Da be oad? O, pa oan bihan-tre! Met, da vat, em eus kroget tro... n'ouzon ket... ugent vloaz? Da ganañ e-giz-se gant mignoned, diouzh an noz.*

Sten *Da lâret eo, pa oas bihan er skol, 'peus bet kroget da ganañ?*

Jean-Luc *Ya, er skol 'm eus kanet kalz, hag em bije kanet muioc'h memes ma vije bet muioc'h a sonerezh er skol, er mare-se. Hag er gêr gant ma zud-kozh ivez.*

Sten *Er c'hlas e vezes e foñs ar sal?*

Jean-Luc *Muioc'h e foñs ar sal, ya, o hunvreal alies.*

Sten *O sevel kanaouennoù?*

Jean-Luc *Ya, marteze, pe o tresañ. Tresañ a blij e kalz din.*



Maeva *Penaos 'peus kroget da ganañ?*

Jean-Luc *Penaos 'm eus kroget da ganañ? Al N'ouzon ket re, ne'm eus ket soñj re, se zo pell a-walc'h dija. An dra-se a blij e din abaoe pell, forzh penaos. Ur wech em boa skrivet ur ganaouenn, hag em boa bet c'hoant da lakaat sonerezh warni, hag aze 'oa en em ginniget un den evit dont da c'hoari ganin - Xavier Leconte, a oa o c'hoari ouzh ar violin - ha setu unan all 'oa en em ginniget, ha setu savet an traoù e-giz-se, tamm-ha-tamm...*

Sten *Pa oas bihan e oa bet lavaret dit "Serr da c'henoù!" pe "Kanañ a rez brav, Jean-Luc!"?*

Jean-Luc *Va mamm-gozh a lavare din atav: "Te a gan brav, Jean-Luc, kendalc'h!"... Ma petite est comme l'eau, se a veze atav ganin.*

Sten *"Tube" kentañ Jean-Luc Roudaut?*

Jean-Luc *Ya!*

Sten *Petra 'soñjit, kanañ a ra brav pe get?*

An holl *Ya!!*

Tangi *Petra 'peus graet a-raok bezañ kaner?*

Jean-Luc *Meur a dra, met an dra zivezhañ a-raok bezañ kaner e oa skolaer e Skol Diwan Brest, hag em eus dilezet evit kanañ.*

Sten *A-raok bezañ skolaer 'poa graet a bep seurt micherioù?*

Jean-Luc *Ya, pesketaer, luc'hskeudenner... A bep seurt...*

Hoel *Peseurt buhez a gavez ar plijusañ, kaner pe skolaer?*

Jean-Luc *Ouh... An dra-se zo diaes da lavarout... Pa oan skolaer e oa plijus-tre al labour. Bremañ pa'z on kaner eo plijus-tre ivez, me 'gav din 'eo mat pep tra!*

Sten *Muioc'h a labour zo bezañ kaner pe bezañ skolaer?*

Jean-Luc *N'eo ket ar memes labour. Pa vezes skolaer 'pez bugale ganit, pa vezes kaner e vezes un tammig muioc'h da-unan, evit prientiñ an traoù. N'eo ket ar memes labour tamm ebet!*

Sten *Ma ne vijes ket bet skolaer a-raok, ne vijes ket bet kaner?*

Jean-Luc *Kredabl bras, ya. Pe ket er memes doare!*

Sten *Ne vank ket dit bezañ gant bugale bemdez?*

Jean-Luc *Eo! Aze 'm eus graet ur rempasamant e Banaleg, ur sizhunvezh gant bugale 'oa dreist!*

Hoel *E pelec'h out bet skolaer?*

Jean-Luc *E Banaleg, hag e Brest.*



Hoel *Ha bremañ, daoust hag-eñ 'peus ur vicher all?*

Jean-Luc *Ne'm eus ket, nemet kaner!*

Sten *An dra-se zo ur vicher penn-da-benn?*

Jean-Luc *Sañset, ya! Evit lod eus an dud n'eo ket, met evidon eo penn-da-benn, ya!*

Sten *Ur vicher leun amzer?*

Jean-Luc *Leun amzer, ya. Hag an devezhioù n'int ket hir a-walc'h evit dont a-benn d'ober pep tra!*

Sten *Ur vicher paet mat?*

Jean-Luc *Pas re, nann. Met traoù all zo e-kichen zo talvoudusoc'h eget an arc'hant marteze.*

Jeanne *Perak 'peus graet ar vicher-se?*

Jean-Luc *Perak? Peogwir e plije din kanañ gant ar vugale ha kanañ evit an holl. An dra-se zo un doare da lavaret traoù hag a zo plijus a-walc'h evidon.*

Sten *Ne oa ket tu dit da lavaret traoù 'zo pa oas skolaer?*

Jean-Luc *Eo, met en un doare disheñvel. Kanañ a ran evit an dud, evit lavaret traoù d'an dud, evit darempredif ganto un tammig donoc'h, un tammig pelloc'h...*

Maeva *Pelec'h 'peus kanet da vat evit ar wech kentañ?*


Jean-Luc *Ne'm eus ket soñj ken, tamm ebet! Se zo 10 vloaz zo... N'ouzon ket... Marteze er "Flash" e Plougerne, a oa un davarn a rae abadennoù diouzh an noz, marteze 'oa aze, gant Yvon Etienne.*

Sten *Petra 'poa kanet? Traoù e galleg, brezhoneg, saozneg...?*

Jean-Luc *Traoù e galleg. E brezhoneg ivez: lakaet em bo tonioù war barzhonegoù Anjela Duval.*

Tangi *Daoust hag-eñ e plij dit kanañ rock?*

Jean-Luc *Ya, evel-just. Me 'gav din eo a-bouez kanañ e brezhoneg ha kanañ rock e brezhoneg. Me 'soñj din eo ur yezh a glot mat-tre gant ar rock, gant ar spered a zo tro-kein ar rock ivez. Liammet-tre eo an daou.*



Tangi *Perak?*

Jean-Luc *Me 'soñj din eo ar rock ar sonerezh a-vremañ, ar brezhoneg ur yezh a-vremañ, ivez. Ret eo dimp-ni diskouez eo liammet-tre ar rock hag ar vuhez modern hag ar brezhoneg.*

Sten *'Peus ket klasket kanañ traoù hengounel, gwerzioù, sonioù?*

Jean-Luc *Ne blij ket re din, e gwirionez. Pep hini en deus gwir d'ober ar pezh en deus c'hoant, met n'eo ket va zachenn din!*

Hoel *Piv en deus krouet Rêves de Gosse?*

Jean-Luc *E penn kentañ e oan va-unan. Ha tamm-ha-tamm ez eus deuet tud da c'hoari ganin.*

Sten *Muzikerien zo a oa dedennet gant seniñ gant ur c'haner brezhonek?*

Jean-Luc *Ya, lod a oa dedennet, deuet int da welet petra oa ar sonerezh a oa ganin. Tamm-ha-tamm int bet staget, ha chomet int.*

Erwan *Perak hoc'h eus dibabet an anv "Rêves de Gosse"?*

Jean-Luc *Peogwir e klote mat gant spered an dud er strollad, tout an dud a hunvree, pa'z oant bihan, seniñ e-giz-se un hunvre evit an holl!*

Lomig *Piv zo er strollad?*

Jean-Luc *Ouzh ar sintetizer: Martial Herry
Ouzh ar gitar tredan: Dominique Robineau
Ouzh ar gitar boud: Philippe Quéau
Ouzh an taboulinoù: Bernard Thepaut
Ouzh ar piano tredan: Odile Ferec
Ouzh ar gitar sec'h: Patrice Gwegan
ha Jean-Luc Roudaut! Spi 'm eus ne'm eus disoñjet den ebet, mod all e vin chikanet ganto! Ha Nolwenn Korbell a zeuio ganeomp a-benn nebeut da ganañ. Nevez-tre eo, abaoe ar bladenn ziwezhañ. Bez' hor boa graet ur bladenn asambles dija, Ullis 31 ha Yakari. Nolwenn a gan ur blues, un tammig evel "Blues Trottoir".*

Maeva *Da ganaouennoù zo evit ar vugale pe evit ar re vras?*

Jean-Luc *Me 'gav din ez int evit an holl... N'ouzon ket hag-eñ ez eus kanaouennoù a-ratozh evit ar vugale pe evit ar re vras.*



Sten *E penn kentañ int bet graet evit ar vugale?*

Jean-Luc E penn kentañ, ya, met traoù 'zo zo donoc'h, e-keñver an apartheid. Savet int evit ar vugale memestra, met gouest eo ar re vras da gompren anezho!

Jeanne *Piv a sav ar c'hanaouennoù?*

Jean-Luc Meur a zen! Michèle Beyer, skolaerez me 'gav din, Jean-Luc Roudaut, Sylvain Kernoa - ur paotr o labourat gant FR3, oc'h ober mouezhioù war Ullis 31... Martial Menard, anavezet ganeoc'h kredabl, Daniel Doujet, skolaer en Oriant, saver istorioù ar roue Kofok pe Fulupig Fri-Furch... Youenn Gervalan, en deus savet "Burzhud Koad an Dug", un istor Nedeleg brav-tre, Klet Beyer, ur bugel 6 vloaz en deus savet "Koad an Noz"... Marivon Berr, skolaerez e Kemper...

Sten *... Ha renerez ar gazetenn Cholori...*

Jean-Luc Savet he doa "Trotig an Arzhig" ha "Bouboubou" c'hoazh war ar c'hasedig kentañ. Bepred ar memes re eo a sav traoù brav!

Erwan *Peur e pleustroc'h?*

Jean-Luc Bep yaou, e skol Diwan Brest, war-lerc'h an devezh skol - trouzus e vefe evit ar vugale ma rafemp an dra-se e-pad ar mare skol, met marteze e plijfe dezho!

Sten *Pegeit e pad?*

Jean-Luc Un hanter-zevezh.

Hoel *An hevelep tud a gaver er strollad bremañ hag a oa a-raok?*

Jean-Luc Unan nevez zo deuet, paotr ar gitar tredan, Dominique Robineau, abaoe ur bloavezh. Emañ eus Bro-Anjou.

Sten *N'eo ket diaes evitañ seniñ gant ur c'haner brezhonek?*

Jean-Luc Nann. Ouzhpenn eo en em lakaet 'barzh ar jeu e-keñver ar brezhoneg, dont a ra a-benn da zistripañ un nebeud gerioù - plijout a ra dezhañ ouzhpenn! Paket mat en deus ar spered a zo er vro, e-keñver ar sonerezh... En e jeu emañ gant ar brezhoneg.

Jeanne *Perak e kanez kanaouennoù evit ar vugale?*

Jean-Luc Pa oan skolaer e kave din e vanke traoù nevez evit ar vugale, hag e oan en em lakaet da sevel kanaouennoù all, rak ne gaven ket traoù nevez war ar marc'had. Ouzhpenn-se, me 'gav din, ar vugale zo dazont ar yezh, ret eo reiñ boued ha danvez a-vremañ dezho, da sachañ anezho muioc'h c'hoazh war-zu ar brezhoneg.

Sten *Petra 'soñjez eus ar c'hanaouennoù all bet savet e brezhoneg evit ar re yaouank?*

Jean-Luc Pep hini zo libr d'ober ar pezh en deus c'hoant met n'eo ket gant traoù kozh e vo sachet spered ar re yaouank war-zu tachenn ar brezhoneg. Ret eo reiñ dezho traoù a glevont er skingomz hag er skinwel. Ne welan ket perak e vefemp atav war-lerc'h.



Sten *... "Liberta", da skwer?*

Jean-Luc Kanet gant Yvon Etienne? Mat-kenañ! Da'm soñj eo ar memes spered egedon!

Florence *Gwerzhañ a rit mat ho pladennoù?*

Jean-Luc Mat-tre! "Trotig an Arzhig" zo bet gwerzhet 2000 anezho. Spi hon eus e vo gwerzhet "Kanevedenn" gweloc'h, 5000 marteze. Ur bladenn a vez gwerzhet mat e Breizh a vez gwerzhet 5000 skwerenn anezhi, Servat, Glenmor, Sonerien Du da skwer. Stiveil pe Tri Yann a werzh kalz muioc'h, rak brudet int e diavaez-bro. Ouzhpenn-se o deus tiez tro-dro d'ober bruderezh...

Sten *Pladennoù ha kasedigoù Rêves de Gosse ne vezont ket gwerzhet er-maez eus Breizh?*

Jean-Luc "Kanevedenn" vo kavet e Paris, er FNAC. An dra-se a c'houlenn kalz ar-c'hant, lakaat anezho e gwerzh er-maez eus Breizh. Graet eo al labour skignañ gant Breizh-Diffusion.

Hoel *Pet pladenn 'peus savet, ha pet emañ e soñj sevel c'hoazh?*

Jean-Luc Kasedig 'Raok an Diroll, pladennoù Dihun, Yakari hag Ullis 31, ha bremañ Kanevedenn... Ma vez gwerzhet mat e vo savet meur a hini war-lerc'h!

Sten *Piv a ra war-dro an abadennoù, un "impresario"?*

Jean-Luc Ya, ur "manager", paotr ostaleri ar Bataclan e Brest, Michel Louboutin. Sonerezh bep yaou eno.

Jeanne *Daoust ha c'hoant az pefe da vezañ ken brudet ha Michael Jackson?*

Jean-Luc Piv eo hennezh?

(C'hoarzhadennoù gant an holl)

Jeanne *An hini a gan "I'm bad"...*

Jean-Luc A ya, an hini a oa du a-raok, hag a zo dislivet tout bremañ! Ya, kanañ a ra brav ouzhpenn, gwir eo. Met evit bezañ ken anavezet hag eñ e vo ret deomp poaniañ! N'ouzon ket hag-eñ ez on a-du gant e spered, met brav eo ar pezh a ra! Plijout a rafe deomp bezañ ken brudet hag eñ, met kanañ a rafemp e brezhoneg penn-da-benn memestra.

Maeva *Ha c'hoant 'pije da vezañ urzhiet en Top 50?*

Jean-Luc An top petra... ya... Pa glevan ar pezh a glevan n'ouzon ket hag-eñ en dije c'hoant da vezañ mesket gant ar moc'haj-se.

Sten *Lod traoù zo brav a-walc'h memestra...*

Jean-Luc Ur wech bep an amzer, ya. Pa zeu Johnny Clegg, evel-just, e tegas heol memestra. Un tammig berr eo an Top 50 mod all, memestra!



Katell Peseurt doare kanaouennoù zo war Kanevedenn?

Jean-Luc Bez' e vo kavet un tammig eus pep tra: traoù evit ar vugale, "Dihun" zo bet adkempennet, traoù evit ar re vras ("Gwenn ha du"), "Bugale ar bed" zo evit an holl. "Ma mestrez-skol" zo brav-tre, peogwir eo bet savet get Daniel Doujet - n'ouzon ket hag-eñ e vo a-du an holl skolaerezed gant an dra-se, gwelet 'vo!!

Jean-Luc N'int ket blues, n'int ket rock, n'int ket reggae, un tammig eus pep tra 'vo kavet. An tonioù zo un tammig evel ar golo, leun a livioù. N'eus kanaouenn hengounel ebet, nemet ar yezh zo eus ar vro!!
Ur ganaouenn zo anvet "Nelson Mandela", gouzout a rit piv eo?

Jeanne Un den du, me 'gred?

Tangi ... A zo en toull-bac'h, n'ouzon ket pet vloaz zo, kalz...

Jean-Luc Kalz re!! Ha gouzout a rit perak eo bet plantet en toull-bac'h?

Jeanne Peogwir e tiffenne ar re zu!

Lomig Peogwir emañ a-enep an apartheid!

Jean-Luc Setu perak hon eus bet c'hoant da lakaat ar ganaouenn dindan e anv, Nelson Mandela... Hag er ganaouenn emañ o hunvreal emañ e vro dieub un devezh bennak, e vro hag an dud a zo du!



Luchskudennoù: L. BLONCE

Indianed ar C'hompezennoù

Skrid gant B r i e g A R M E N N

Tresadennoù gant M a l o A R M E N N



Tipi zsinboin, luc'hskeudenn bet tennet a dibenn an XIXvet kantved

Pobladeg ar C'hompezennoù

Eus pobladeg Amerika e-kerz ar ragistor ne chom nemet reoù dister: binvioù askorn kavet er Yukon... Nemet a-du eo an darn vrasañ eus an istorourien evit diogeliñ e krogas 45 000 a vloavezhioù 'zo dre strizh-mor Bering. Tu a voe d'un nebeud meuriadoù da dremen dre eno peogwir n'eo bet goloet al lec'h gant ar mor nemet 25 000 a vloavezhioù diwezhatoc'h.

Setu ez eo an Indianed tud a ouenn velen - ha n'eus ket a "ouenn ruz"! D'ar mare ma tilestras ar Spagnoled er Bed Nevez e oa etre 800 000 hag ur milion annezad er c'hevandir Norzamerikan. Er pennad-mañ ne vo pledet nemet gant Indianed ar C'hompezennoù, da lavaret eo Indianed ar filmoù "western" enta...

Kent donedigezh ar re Wenn, pe gentoc'h hini ar c'hezeg, e veze rouez ar meuriadoù o vevañ e-kreiz ar C'hompezennoù. Darn anezho ne gredent ket mont da heul ar bandennadoù ejened-mouek war-zu kreiz ar plañennoù dre ma vezent war droad: gant-se e choment tro-dro. Bevañ

a raent divar gounit un nebeud plant - maiz, fav, koulourdrennoù, h.a., divar ar c'hutuilh, an eskemmoù ha dreist-holl an hemole'h. Met a-fet ejened-mouek e oa ret dezho gortoz ken ma trenenje bandennadoù nepell diouzh o c'hampou.

Kentañ Indianed Norzamerika o deus bet anavezet ar c'hezeg eo ar bPueblo (diwar ar c'hastilhaneg "pueblo", pobl). E-pad ar ragistor e oa bet kezeg nemet steuziañ a reas ar ouenn evit abegoù dianav. Digantreidi e oa ar Puebloed, ha ne glaskjont ket implijout al loened talvoudus-se. Dre eskemm prizonidi ha dre laerezh ivez (digant ar Spagnoled) ez eas kezeg gant ar Gomanched, a ziskouezas bezañ doñvaerien ha marc'hegerien eus ar re wellañ er bed.

Lod eus ar c'hezeg a veze kollet ivez, hag en ec'honder divent ar C'hompezennoù e teujont da vevañ gouez, bastartoc'h met solutoc'h ha gouzañvusoc'h. Tamm-ha-tamm e pignont etrezek an Hanternoz ha pep meuriad a zaskas buan o fakañ, o doñvaat hag ober ganto. E 1541 e krogas ar skignadur dre ar C'hompezennoù.




War ar gartenn-mañ e weler e oa ar Gio-waed hag ar Gomanched uhel-tre e-keñver Mec'hik (bir 5); splann eo: bet int bet ar re gentañ o kaout an e-ened-mouek etrezek an Hanternoz. Dre-se e skoazell-jont da skignañ ar Chas Bras, evel ma veze graet ganto diouzh ar c'hezeg.

Setu emroadur ar skignañ kezeg dre ar C'hompezennoù: gouzout a reer e vezent implijet war-dro 1700 gant ar Wichitaed hag an Uted, e 1730 gant an Droatueked,

e 1738 gant ar Cheyened hag an Arikaraed (istorourien zo a lavar war-dro 1770 kentoc'h), e 1742 gant an Detoned (ur skourr eus ar boblad siou) hag an Apsaroked, e 1770 gant ar Yantonaed (Sioued all), e 1772 gant ar Gried, e 1776 gant an Asiniboined hag e 1784 gant ar Sarsied.

Oc'h aloubiñ kreiz ar C'hompezennoù, pobloù ar Reter (1, 2, 9) a vountas ar re all war-zu ar C'hreisteiz (5, 4, 3) hag ar C'hornôg (7, 6).



- Bevennoù douaroù an Indianed o vevañ diouzh sevenadur ar C'hompezennoù
- koadeler avalpineted
- koadeler gwez dibourc'hidik
- kopezennoù geot uhel
- kopezennoù geot berr
- ar Menezioù Roc'hellek
- gouelec'hoù
- douaroù ma oa ar bobl-mañ-pobl e 1650; da belec'h e tivrojent goude zo diskouezet gant ar bir

- 1 Arapahoed, Asiniboined, Cheyened, Sioued, Sauked ha Foksed
- 2 Iowaed
- 3 Wichitaed
- 4 Apacheed ar C'hompezennoù (ne chomo nemet ur bobl diouto er plaezennoù: ar Jikarilhed)
- 5 Kiowaed, Komanched
- 6 Shoshoned, Fritoullaged
- 7 Apsaroked, Atsinaed
- 8 Sarsied
- 9 Kried, Troatueked



Ar pobloù

Ar gantreerien

An Apsaroked

E saozneg: "The Crows" (ar brini). Dre ma oant enebourien douet d'an Hidatsaed, d'ar Sioued ha d'an dTroatueked e servijent a-galon-vat an arme evel anaouderien, an hini brudetañ anezho, Curley (Ches-His) e anv, a oa dindan urzhioù ar jeneral Custer. Tud kran ha lorc'hus a oa anezho. Ardamez jestre: ar sin indian ha neuze derc'hel an arzorn a-us d'an tal, ar paly troet war-zu an diavaez, evit aroueziañ nij al laboused pe an doare da bladañ ar blev.

E 1871 e oa 2 700 anezho e skourrad "Apsaroked ar Menezioù" (Mountain Crows) ha 1 400 e skourrad "Apsaroked ar Stêr" (River Crows); e 1905 avat ne chome ken nemet 1 826 anezho en holl.

An Arapahoed

"Arapahoed" e saozneg. En arapahoeg e vez graet gant ar ger "Inuufaina" evit lavaret "Hor pobl". Aze c'hoazh e vez diforc'het Arapahoed an Hanternoz ha re ar C'hreisteiz. Mignoned vras d'ar Cheyened, sioul gant ar Sioued, ar gKiowaed hag ar gKomanched e oant abaoe 1841, met brezeliñ a raent dalc'hmat a-enep ar Shoshoned, an Uted hag ar bPawnieed. Tud degemerus, kadarn ha troet gant an traoù speredel o deus diskouezet bezañ (e-mesk dalc'hidi bervidantañ Dañs ar Speredoù e oant).

Souezhusat tra er C'hompezennoù: douaret e veze o re varv ganto.

Ma oa 3 000 anezho e 1780, ne chome ken nemet 1 419 anezho e 1910.

An Asiniboined

"Assiniboine" pe "Stoney" e saozneg. Eus ar chippewaeg e teu an anv-mañ hag a dalvez kement ha "An hini a gegin oc'h ober gant mein". Kevredet gant ar gKried e vrezelent ouzh ar Sioued daoust ma vevent gant ar Yanktonaied a-raok 1640. Enebourien d'an dTroatueked e oant ivez. Ma oa 10 000 Asiniboan e 1780 ne chome ken nemet 1 253 e 1910, en abeg d'ur vrec'h poreek war-dro 1835.

An Atsinaed

Dezho met d'ur bobl all ivez, an Hidatsaed, ez eus bet roet an anv "Gros Ventres" gant ar C'hallaoued, daoust ma n'eus liamm ebet etre an div bobl. Arabat eo neuze o zroukveskañ. 510 Atsina e 1910, setu ar pezh a chome eus an 3 000 a oa o vevañ e 1780.

Ar vBoungied

"Bungis" e saozneg. Gant ar C'hallaoued e vez graet "Ojibwas de plaines" anezho ivez. En em rannañ diouzh Ojibwaed ar C'hoadoù ha mont d'ar C'hompezennoù a roas dezho un doare bevañ par da hini ar gKried hag an Asiniboaned.


E 1850 e oa 500 anezho hepken.

Ar Cheyened

"Cheyennes" e saozneg hag e galleg. Eus ar sioueg "Shahi Yena" hag a dalvez kement hag "Ar re a goms ur yezh isklis" e teu anv ar neuriad-se.

Teir rann zo: Cheyened an Hanternoz, re ar C'hreisteiz hag ar Sutaioed - ur bobl all degemeret en o zouez gant ar Cheyened da vare pobladed ar C'hompezennoù eo ar Sutaioed e gwirionez.

un tipi





Abred-tre eo en em glevet ar Cheyened gant ar pobloù galloudusañ tro-dro dezho evit dere'hel penn ouzh an alouberien wenn. Div wezh eo bet kiriek an arme da lazhadegoù a-enep dezho: e Sand Creek hag e Washita River, kampoù annezet gant Cheyened ar C'hreisteiz, Kitell-Zu en o fenn ("Black Kettle"), anezhañ un den a beoc'h koulskoude.

Cheyened an Hanternoz a voe harozed truezus un dec'hadenn spontus renet gant Bleiz-Bihan ("Little Wolf") ha Koutell-Ball ("Dull Knife"). Brudet-kenañ eo ar bennadourien Fri-Roman ("Roman Nose") ha Tary-Mentek ("Tall Bull"), penn ken-vreuriel an Dud-Chas, da lavaret eo an "Dog Soldiers" a rae aon bras d'ar re Wenn.

Brudet e oa o c'hadarned hag o reol-vuhez strizh, dreist-holl gant ar mer-c'hed. Ardamez jestre: skeiñ a-daoladoù war ar biz-vod kleiz gant an hini dehoù. Bez' e oa 3 500 Cheyen e 1780 ha daoust d'al lazhadegoù e voe kontet 3 312 anezho e 1904.

Ar Jikarilhaed

Apached o vevañ er C'hompezennoù int. Gant ar vMec'hikaned e oa bet roet an anv "Jicarillas" dezho peogwir e oant kantenerien eus ar c'hentañ - kement ha "panerig" e talvez "jicarillo" e kastilhaneg. Taer e oant gant neb, gwenn pe indian, a glaske aloubiñ o douarou. Stabli a-walc'h eo chomet o niver: 800 den e 1845 ha 795 e 1904.

Ar gKiowaed

An hevelep ger eo e saozneg hag e galleg. Savet o doa ar gKiowaed ur c'hengevredad galloudus gant ar gKomanched hag ar gKiowa-Apached, ar pezh o skoazellas da gas argadennoù betek Durango, e Mec'hik. Atahinusañ pobl ar C'hompezennoù e oa ar gKiowaed, met plegañ a rankjont goude bezañ bet trec'het gant an arme e 1875.

Greomp anaoudegezh gant un nebeud pennoù kiowa, mar fell deoc'h...

Ar penn Arz-a-ro-Taoliou-Pav ("Kicking Bear") a gomprenas buan e oa aner breze-liñ ouzh ar re Wenn; setu perak ez implijas e levezon vras evit sioulaat e re, ha dont a reas a-benn da gendrec'hiñ an trifarzh eus e veuriad da chom hep kemer perzh en ensavadenn 1873 kaset gant Sa-

tanta ha Bleiz-Digenvez. Goude o zoull-bac'hadenn e teuas da vezañ penn neur an holl Giowaed, met drouklazhet e voe gant ampoezon en abeg d'e vignoniez re vras gant ar re Wenn.

Bleiz-Digenvez ("Lone Wolf") a gilpenas ouzh ar re Wenn goude ma voe lazhet e vab ganto. Trec'het e voe en emgann Palo Duro Canyon (a-gevret gant e genstourmerien Cheyened ar C'hreisteiz hag ar Gomanched) d'ar 26 a viz Gwengolo 1874. E Fort Marion, Florida, e voe for-bannet e-pad tri bloaz. Mervel a reas e 1879, un nebeudig amzer goude e zistro. Satanta ("White Bear", Arz-Gwenn) a oa hegad-kenañ ha da vrasañ prezegour ar C'hompezennoù e vez tremenet. En em lazhañ a reas dre lammat dre ur prenestren e doull-bac'h en Texas.

Setangya ("Sitting Bear", Arzh-Azezet) a oa beleg-mezeg ivez. Brudet eo evit bezañ bet unan eus atizerien ha hantourien bouezusañ en emglev savet etre ar Giowaed hag ar Cheyened e 1840. Evit talvoud marv e vab ouzh ar re Wenn e tagas ur charreadeg. Lakaet e voe en toull e 1871 met a-ratozh-kaer e lakaas e warded d'e lazhañ e-kers e dec'hadenn.

Setu niver ar Giowaed e 1780: 2 000, ha 1 126 e 1910.



"An Arz-a-ro-Taoliou-Pav"
(Kicking Bear)



Ar gKiowa-Apached

Alies int bet droukvesket gant an Apached hag ar Giowaed, met ur bobl disheñvel eo anezhi daoust d'he darempredoù stank gant ar gKiowaed.

War goulen ar re Wenn, e 1865, en em rannjont diouzh ar Giowaed evit mont get ar Cheyened hag an Arapahoed met goude emglev Medicine Lodge e tistroas al lodenn vrasañ anezho d'o c'hevredad kent.

Digenm e chomas o niver, war-bouez nebeut (300 e 1804 ha 325 e 1891), nemet skubet e voe ur palevarzhad anezho gant ar ruzell hag an derzienn e 1892: 155 anezho hepken a veve e 1905.

Ar gKomanched

Eus ur ger Utek a dalvez kement hag "enebour" e teu an anv Komanch.

Anavezetañ penn ar Gomanched eo Kwaina ("Quannah"). E vamm a oa ur sklavourez wenn, Cynthia Ann Parker, bet skrapot d'an oad a zaouzek vloaz, hag e dad a oa penngadour ar meuriad Kwahadi, an hini atahinusañ e pobl ar Gomanched. E 1867 o doa nac'het sinañ emglev Medicine Lodge.



Kwaina
(Quannah Parker)
penn Komanch

Heg ha kounnar a savas e Kwaina o welet lazhadeg an e-jened-moueck get ar re Wenn, ken ma kasas 700 Komanch ha Kiowa da dagañ diskroc'henerien en Adobe Walls; en abeg d'o fuzuilhoù-tennata e voe ret d'an Indianed diskregiñ. Koulskoude n'en em zaskoras Kwaina nemet goude drouz-wezh Palo Duro Canyon. Neuze e teuas da vezañ ur bamour ouzh an araokadur, ha broudañ a reas e bobl da gemer skwer diouzh ar re Wenn - sevel a reas skolioù zoken. Ouzhpenn e yezh e c'henidik e komze saozneg ha kastilhaneg akuit. Digreskiñ a reas niver ar Gomanched eus 7 000 den e 1690 betek 1 171 e 1910.



Indianes ar C'hompezennoù
(Luc'haekudenn gant Curtis)

Ar gKried

"Kenistenoag", an anv indianek, a zeuas da vezañ "Kristinaux" ha goude "Cris" gant an draperien c'hall; "Crees" a vez lavaret e saozneg.

Enebourien d'ar Sioued ha d'ar Siksiked e oant. Degenerus-meurbet hag onest o deus diskouezet bezañ. Adalek 1640 ez eus bet herberc'hiet misionerien jesuit ganto.

E 1858 ne chome ken nemet ar c'hard eus ar 4 000 Kri a veve e 1835.

Ar Sarsied

Eus an troatuek "Sa arsi" ("ket mat") e teu an anv-mañ. "Avanked ar C'hompezennoù" a vez graet diouzh ar Sarsied ivez.

Da heul un tabut e pobl an d'fatined e tivroas ar strollad gwanañ, ar Sarsied, d'ar C'hompezennoù e-lec'h ma kemerjont un doare bevañ levezonet-tre gant hini an Droatueked. Gwerzhañ a raent e-leizh a feur da gevredad ouf Hudson.

Digresket eo an niver anezho eus 700 e 1670 betek 160 e 1924.



Ar Sioued

Un distummadur eus ar ger chippewaek "Nadoweis-iv", an enebour, eo an anv-mañ. E saozneg e vez graet "Dakota Indians" diouto en un doare hollek. "Sioux" a vez graet e galleg.

Ar bobl niverusañ a c'heller kavout er C'hompezennoù eo ar Sioued, setu perak ez eus un toulladig mat a skourroù emmi:

Kornôg ar stêr Missouri	
Tetoned	an Oglalae ar Sikaŋgoued ar v-Minikoŋjoued
Teton-Saoneed	an Hounkpapaed ar Sihasapaed an Itazipkoed an Dohencumpaed

E Reter ar stêr Missouri	
Santied	ar v-Mdwakaŋtoned ar Wahpetoned ar Wahpekouteed ar Sisetoned
Yanktoned	ar Yanktoned ar Yanktonaeid

Gant an dTetoned hag an dTeton-Saoneed e vez komzet ar rannyezh lakotaek, gant ar Santied ar rannyezh dakotaek ha gant ar Yanktoned an hini nakotaek.
Pennoù brudet a gaver e-touez ar Sioued: An Oglala Marc'h-Amerikan ("American Horse") a glaskas sioulaat ar re a chome prest da sevel a-enep ar re Wenn e 1890. Marc'h-Foll ("Crazy Horse") en doa kemeret perzh gant kardedd hag efedusted e Brezel ar Sioued, dindan urzhioù Koumoulenn-Ruz ("Red Cloud") - un Oglala all - hag en emgann Little Big Horn.
An Hounkpapa Pizi a zo bet ur brezelour bras, brudet e guriou, ha hep mar unan eus ar brasañ penngadourien indian: gant Marc'h-Foll eo bet pennatizer trec'h Little Big Horn. Bet eo bet ivez unan eus an Indianed rouez o deus gallet heñvelaat ouzh ar re Wenn peogwir ez eas da gouer ha goude da varner en e virva. Glav-en-e-Zremm ("Rain-in-the-Face") eo bet anvet un Hounkpapa all peogwir

e tresas ar glav roudennoù war e zremm livet, un deiz ma tistroe eus un emgann. Eñ ivez a stourmas en tu gant Marc'h-Foll ha Koumoulenn-Ruz.
Tary-Azezet ("Sitting Bull") zo marteze an Indian brudetañ er bed dre m'eo bet beleg-mezec an Hounkpapaed ha dreist-holl penn meur an Indianed e Little Big Horn, daoust ma ne gemeras ket perzh en emgann. E Kanada e chomas gwarezet e-pad un nebeud bloavezhioù, ha neuze an droug-hirnez e lakaas da zistreiñ. Goude daou vloavezh en toull-bac'h e voe kaset da virva Standing Rock. Distourm e seblante bezañ, hag er Wild West Show renet gant e vignon William "Buffalo Bill" Cody e kemeras perzh zoken.
Lazhet e voe e 1890 e-kers ur c'hann etre ar polis indian ha dalc'hidi Dañs ar Speredoù o doa e bedet.




"Laeret hoc'h eus hon douaroù diganip ha graet tud a-veze lezenn diouzhimp. Kasaat a ran an holl re Wenn. Laron ha gauierien ez oc'h."

Dre ma oa beleg-mezec ha kadour aspart war un dro e voe Sitting Bull penn ar Sioued (Hounkpapaed). Rakgwelst a reas trec'h Little Big Horn (1876) e-kers un Dañs an Heol n'en doe aberzhet kant tann eus e gignañ. Ne baouezas ket ar penn kozh a gasast ar re Wenn avat: distaget gantañ ar gerioù meneget a-us, e kavas gwelloc'h e jubennour treññ gant traoù divlaz, ha strakal a reas ar re Wenn d'e gonzoù!

Tatanka Iyotake (Tary-Azezet)

Bran-Vihan ("Little Crow"), ur Mdwakaŋton, a vroudas un dispac'hadenn e miz Gouere 1862 en e virva paour er Minnnesota. Lazhet e voe ouzhpenn 1 000 trevadennad gant an emsavid ha spouronet ar re all hed-ha-hed 400 kilometr. Trec'het e voent e miz Gwengolo met lazhet e voe Bran-Vihan, a oa deuet a-benn da repuiñ e-touesk an Dakotaed, ar bloaz goude get daou zen wenn hep abeg ebet.
Lest-Marellet ("Spotted Tail") a gasas e bobl sikaŋgou d'ar brezel ouzh ar re Wenn met trec'het, barnet d'ar marv ha distaolet e gastiz e touas chom hep kemer perzh en emgannoù, ar pezh a reas.
Ardamez jestreker ar Sioued: ober neuz da droc'hañ e c'houzoug gant an dorn dehoù a-blad.
"Dakota" zo bet lakaet da anv unan eus ar Stadoù-Unanet.



Red Cloud

25 000 Indian siou a oa e 1780, hag e 1904 e voe kontet 27 175 anezho.

An dTroatueked

Teir rann zo eus ar bobl-mañ: ar Siksi-kaed, ar gKainahed hag ar bPikonied - en urzh hag e saozneg: Blackfeet, Bloods ha Piegans, met graet e vez "Blackfeet" (Tred Du) anezho dre vras.
Dindan o gwarez e veze an Atsinaed hag ar Sarsied. Gant ar re Wenn ne gant na mignoned nag enebourien virion; gant ar Sioued, an Asiniboined hag ar Gried avat en em gannet. An dud drant-mañ n'o deus anavezet brezel-diabarzh ebet.
Ardamez jestreker: stokiñ ouzh an troad ha diskouez un dra bennak du.
Digreskiñ a reas niver an Droatueked eus 15 000 e 1780 betek 4 635 e 1900.



Washakie

Pobloù an Uhelgompezennoù

Doare bevañ pobloù ar C'hompezennoù o doa em lakaet warnañ penn-da-benn.

Ar vBannoked

"Panaiti" e bannoek ha "Bannocks" e saozneg.
Kreñvaet e veze o darempredoù gant ar Choched dre euredoù etre tud eus an div bobl.
Argadennoù an Droatueked ha dreist-holl ar vrec'h o gwaskas kement ma chomas 500 Bannok e 1869 pa oa 8 000 anezho e 1829. An emsavadenn a gasjont a-enep ar stad o c'horvove a yeas da get.

Ar Choched

Choched ar Reter eo a gomzimp diwar o fenn, "Wind River Shoshones" o anv e saozneg.
Bountet muioc'h-mui war-zu ar Meneziou Roc'hellek gant an Droatueked hag an Atsinaed e teujont da vezañ mignoned d'ar re Wenn dre banterouriezh Washakie, goude ma voe lazhet e vab gant Sioued.
Souezhusat tra; da rener e voe lakaet Washakie on-dro gant e bobl, hag eñ 70 vloaz; neuze e steuzias e-pad daou viz ha gant 6 skalp indian e tistroas d'e gamp...
Ne zigreskas ket re niver ar Choched etre 1820 (15 00 den) ha 1878 (1 250).



Ar Fritoulleged

Graet e vez "Noz-Perçés" (Pierced Noses e saozneg) diouto rak gwelet e oa bet gant beajourien e hall merc'hed bravigoù en o fri en ur meuriad Fritoulleged, eus ur meuriad all e teue ar merc'hed-se e gwirionez, ha ne oa ket eus ar c'hiz-se gant ar Fritoulleged...

Siwazh, n'eo ket bet o anv ar gaou ne-metañ bet graet dezho.

Kristenaet e oa bet ar vrezelourien galdarn-se, ha bevañ a raent e peoc'h gant ar re Wenn. Dalc'het o doa ar Fritoulleged d'o ger - chom hep lashañ den gwenn ebet - zoken pa oa bet torret an emglevioù gant ar re Wenn ha zoken pa oa deuet trevadennerien d'ober o annez war o douaroù en ur zegas trubuilh. Met e 1877, goude ma voe bet dizoleet aour war o douaroù, e voe roet an urzh d'ar Fritoulleged gant ar stad Wenn da zivroañ d'ur mirva en Idaho a-barzh 30 devezh.



Himmatowalahtqit (Chief Joseph), penn fritoulleged unan eus brasañ penngadourien istor mab-den

Tud yaouank ar meuriad a yeas e fulor hag a dagas ar re Wenn. Neuze e tivizas ar penn Himmatowalahtqit (Arnev-o-tont-war-ar-Gompezenn, Chief Joseph) tec'hel war-zu Kanada gant e bobl. Ganto un niver bras a vere'hed hag a vugale e teuas ar Fritoulleged a-benn da reiñ lamm d'an arme peder gwezh hed-ha-hed 2 375 Km ha 12 krogad-emgann. Siwazh e voe ret da Chief Joseph en em zaskoriñ pa oa degouezhet d'un nebeud kilometradoù hepken diouz Kanada. Pennek sizhunvezh he doa padet beaj ar Fritoulleged.

Evit-se e vez dalc'het koun eus Chief Joseph evel unan eus brasañ kadourien istor mab-den. Ken mantrus e voe istor ar meuriad-se ma voe skrivet gant un test "ne c'hellas Chief Joseph, e esped-pad, anzavout gread reizh ebet a-berzh ar Gouarnamant."

Kontet e voe 4 000 Fritoulleg e 1780, met ne oa mui nemet 1 259 anezho e 1910.

Ar Saliched

"Salishs" e saozneg, pe c'hoazh "Flat-heads" (Pennoù Plat). Roet e veze an anv-mañ d'un nebeud pobloù o doa ar boaz dibaot da bladañ klopennoù ar yugale nevez-ganet. Ne oa ket ur c'hiz salich koulskoude: lesanvet int bet evel-se get an draperien rak gant ar Saliched e veze implijet sklaved chinok distummet o fenn. E peoc'h e voe ar Saliched gant ar re Wenn abaoe un emglev sinet e 1855, met stourm a raent dizehan ouzh an Droatueked.


Chomet eo o niver war-dro 600, daoust d'un toull a zo bet e 1853 (325 den).

An Uted

"Yuutaa" eo o anv utek, alese anv ar stad Utah. N'int ket bet re a-enep ar re Wenn ha servijout a rejont en arme evel anaouderien.

O fenn Ouray a gollas e vab en un emgann a-enep ar Sioued hag a zeuas da vezañ mignon d'ar re Wenn; herzel a reas ouzh e bobl a vont da heul emsavidi ha lakaat a reas an enebadennoù da baouez zoken.

Evit an holl Uted, re ar C'hompezennoù hag ar re all, e oa bet kontet 4 000 den e 1780 ha 1259 e 1910.



Ur raskeres ut evit senti Deiz an Arched

Ar pobloù damgantreer

Ar re-se ne fivivet nemet da vare ar bloavezh ma tremene bandennadom ejened-mouek war o douaroù. Kousket a rae neuze an darn vuiañ eus ar pobloù e-barzh tipioloù.

An Arikaraed

Graet e vez c'hoazh Rikaried anezho. An hevelep anvioù a ves implijet e saozneg hag e galleg. "Ariki" eo an anv roet d'un doare korn e pawnieg.

Evel o amezelen ar v'mandaned o deus gouzañvet kalz en abeg d'ar pobloù o tont eus ar Reter, rak er C'hompezennoù e vevont a-raok degouezh ar c'hezeg, ha war-lerc'h en abeg d'ar vrec'h. Korvigelloù etre kevredadoù feur a zegasas ur brezel berr hag enebiezh ouzh ar re Wenn evit pell. Hemolc'hiñ a raent an ejened-mouek e-pad ar goañv ha d'an nevez-amzer e tistroent d'o c'hêrioù.



Kasit ut

Ardamez jestre: ober neuz da ziframmat un doc'hadenn vaiz ha debriñ he greun. Keñverit an daou niver-mañ: 3 800 e 1780, ha 380 anezho hepken e 1904.

An Hidatsaed

E galleg int bet lesanvet Gros-Ventres gant an draperien, hogen arabat eo kenveskañ anezho gant Arapahoed ar C'hreisteiz pe an Atsinaed, a zo bet roet an anv-se dezho ivez.

Memes doare sevenadur ha kevredigezh hag ar v'mandaned hag an Arikaraed o doa, dre ma oant kevredidi etrezo, dre ma vevont an trifarzh eus ar bloavezh e lo-gelloù-pri ha dre ma oant eus ar pobloù kentañ o vevañ er C'hompezennoù diwar ar gounid maiz.

An hevelep kudennoù o deus bet gant ar vrec'h ivez: 3 600 den e 1780 ha 547 e 1910.

An Iowaed

Kement hag "Ar Bobl o Kousket" e talv o anv. Mignoned an Otoed e oant hag evelto e c'hounnezent maiz ha fav. E 1824 e tilezjont o douaroù ha goude e voent divroet da virvaoù en Oklahoma hag er c'hKansas.

Digresket e voe o niver gant an harlu hag ar vrec'h, e doare ma oa 547 anezho e 1910, an hanter nebeutoc'h eget e 1760.



Ar gKansaed

"Kawed" e oa o anv ivez. Komzet e veze ur yezh siouek ganto, an dhegibaeg. Anv ar bobl-se a zo bet roet d'o douarou, a zo aet d'ober ar stad Kansas.

Ar gKapaed

Unan eus ar pemp pobl a veze komzet dhegibaeg ganto: Omahaed, Osajed, Ponkaed ha Kansaed.

Ar vMandaned

"Numakiki" (Hor Pobl) a reont diouto o-unan. Keriadennoù evit ar goañv ha re all evit an hañv o doa. E-barzh logelloù douar savet war kebrivad koad e vevent, ha diwar gounit maiz ha hemolc'hiñ ejened-moueek.

Brudet eo ar Vandaned dre ar bed-holl en abeg da lidoù relijiel gwadus an Okepa, hag a-drugarez da livourien evel George Catlin ha Karl Bodmer.

Ganto e voe ar vrec'h ar spontusañ: eus 1 600 annezad e 1837 (3 600 e 1780) ne lezas nemet 100 den bev - 15 den war 16 a yeas d'an anaon. En em vodiñ a reas ar Vandaned neuze en ur gêriadenn hep ken all. E 1910 e oa div wezh muioc'h anezho.

Ar vMissouried

Komz a reont ur yezh tost-tre da hini an Otoed hag an Iowaed, kar d'ar sioueg. "Chiwere" eo anv o yezh. Kendeuziñ o doa graet gant an Otoed e deroù an XIXvet kantved. Diwar o anv e oa bet badezet ar stêr Missouri River koulz hag ar stad Missouri.

An Omahaed


"Ar Re a ya a-enep an Avel" eo o anv e dhegibaeg - daoust dezho komz ur yezh siouek e vezent alies oc'h ober brezel ouzh ar Sioued.

Chom a raent e logelloù heñvel ouzh re ar Vandaned, nemet e vevent e tipioù da goulz hemolc'h an ejened-moueek.

Lieswreg e oant, ha tu a oa dezho da gaut betek teir gwreg. Anv ar stad Nebraska a dalvez kement hag "ur vro gwall biae" (hag ez eo!) e dhegibaeg. A-hend-all e kaver o anv e Bro-Normandi: "Omaha Beach" zo anv un draezhenn e-lec'h ma tilestras an arme Amerikan e 1944.

Skubet e voe ar boblañs e 1802 gant ar vrec'h - c'hoazh: 300 den hepken manet bev pa oa 2 800 anezho e 1780. Hanterkant vloaz diwezhatoc'h e oa lieskementet o niver dre bevar, ha stabil e chomas betek deroù ar c'hantved-mañ.

logell ar v-Mandaned



An Otoed

"Wat'Ota" (ar C'hastaouerien) eo o anv en o yezh, ar chiwereg. Frouezh teir disrannadur eo ar bobl-se, a veve en Nebraska.

Labourerien-douar o vevañ e-barzh tiez douar e oant, nemet da vare an hemolc'h: tipiù eo o c'hledoure neuze.

1 200 Oto a oa e 1833, ha 332 e 1910.

An Osajed

Dhegibaeg e oa o yezh, hag un distumadur eus "Wazhazhe" eo an anv "Osages" bet roet dezho gant ar Saozon hag ar C'hallaoued.

Heñvel e oa o c'hevredigezh ouzh hini pobloù all ar familh dhegiba: pouez dis-kennadur an tad, an difenn eurediñ tud

eus an heveleg koskor hag embregoù resis-kenañ pep koskor: da skwer o doa lod obererezh miret ar botoù-kroc'hen (pe "mokasinou"), lod all hini ar c'hornou-butun. Mar grae ur c'hoskor war-dro bed ar peoc'h e rae unan all war-dro bed ar brezeliou, hag all. Dalc'hmat eo bet mat o darepredoù gant ar re Wenn.

E-touez pobloù ar C'houperennoù ne oa nemet an Osajed a zibenne o enebourien varv - skalpet e vezent gant ar re all.

Pinvidikañ Indianed Amerika ez int bre-mañ, a-drugarez d'an eoul-maen ha d'ar gaz bet dizoloet war douarou o mirva en Oklahoma.

E 1780 e oa tu da gontañ 6 200 Osaj, ar pezh a zo kalzik e-keñver ar 1 373 a chome e 1910.



"O chasez an ejen-moueek" Maendresadenn gant Catlin, 1844

Ar bPawnie

Eus "Pariki" (Ur C'horn) e teu o anv, en abeg d'ar guc'hennig blev livet o ter-c'hel war o zal ha roet stumm ur c'horn dezhi gant druzoni. "Pawnee" eo o anv e saozneg.

Unan eus meuriadoù pennañ ar gKaddoed eo ar Bawnie. Brudet eo ar Gaddoed evit bezañ bet kentañ hanterourien an eskemm-kezeg etre meuriadoù ar C'hreisteiz ha re an Hanternoz. Mar beve ar Gaddoed er C'hreisteiz (Louisiana) e veve ar Bawnie en Hanternoz, en Nebraska.

Kouerien an traoniennou e oant. E-touez ar peder c'hoskor a ya d'ober o fobl ez eo ar Sdikied ar re vrudetañ. Daougement eo ar bed hervez ar Sdikied, ha lidiazhet e veze ur plac'h yaouank ganto en enor da Werelaouen - termen a

voe lakaet d'ar c'hiz-se gant ur penn yaouank e 1817. Kalz sklaved a oa ganto. Skoazellañ a rejont o mignoned wenn dre vonet da anaouderien en arme da vrezeliñ ouzh ar Sioued.

En abeg d'ar c'hamera hag ar forban-nerezh e tigriskas o niver eus 10000 den e 1780 da 633 e 1910.

Ar bPonkaed

Choazh ur meuriad eus ar familh Deghiba eo ar Ponkaed. Brudet e vezont hiziv-andeiz evit bezañ kanerien ha korollerien dispar.

En Dakota e oa o douarou. Ur bobl binvidik a-walc'h e oa, met ouzhpenn bezañ bet trec'het gant ar Sioued e voe taget gant ar vrec'h: 800 den e 1780 ha 200 nemetken e 1804; dre chañs e kreskas buan o niver en-dro betek tizhout 800 e 1842.



Ar Soked hag ar Foksed

Diwar ar saozneg "Foxes" (Lern) e teu an anv "Foks": "Al Lern Ruz" e oa anv ur meuriad foks.

"Pobl an Douar Melen" e oa anv gwirion ar Soked, ha "Pobl an Douar Ruz" hini ar Foksed.

Kevreet-start e oa an div bobl-se, ha brezelgar spontus. Trec'h 'oant bet war ar pobloù tro-dro gant harp ar Sioued hag an Irokwaed betek ma savas ur c'henn-emsav a-enep dezho. E stad ar Wisconsin e oa o douarou, met alies es aent d'an Iowa, d'ar C'hansas ha d'an Oklahoma da vevañ.

Eus an 3 500 Sok hag an 3 000 Foks a veve e 1780 ne chome nemet 975 en holl e 1909.

Ar Wichitaed


Dianav eo orin o anv. A-wechoù e vez graet "Pani Piques" anezho e galleg ha "Tatood Pawnees" e saozneg. Evel ar Bannied e oa o yezh par d'ar c'hkadoeg. En Texas e oa douarou ar Wichitaed.

E 1541 e kejjont gant ar re Wenn evit ar wech kentañ: ergerzhadenn ar c'honkistador Coronado e oa, ha soñjal a rae dezhañ bezañ bet dizoloet annezidi ur vro anvet "Quivira" ha klasket gantañ.

Kristenaet eo bet ar Wichitaed gant Sant-Frañsezidi. Butun, maiz hag edoù all a veze gounezet gant ar gouerien-se. O chom e-barzh tiez-geot e vezent. War-dro 1890 e teujont da vezañ dalc'hidi Dañs ar Speredoù ha lid ar Peyotl (ur meni kaberlog trezere'hus).

War zigresk ez eas o niver ivez: 3 200 e 1780 ha 318 e 1910.

ti-geot ar Wichitaed



En niverenn-mañ hon eus graet anaoudegezh gant pobloù ar C'hompezennoù...
E TALABAO 18 vo komzet diwar o sevenadur, o brezelioù, o istor, ha gwelet a raimp petra int deuet da vezañ hiziv an deiz. Ken ar wech a zeu enta!


SKEUDENNADUREZH - Luc'hskeudenn gant Curtis, Bettmann Archives, New-York: 19d - Gwirioù miret: 19k, 20, 21d, 21k, 22 - Ministrerezh an Darespredoù Diavaezh, Kanada: 15 - U.S. Signal Corps, National Archives: 18 - North American Indian Collection, Catlin, 1844, Bibliothèque Nationale, Paris: 25 - Mado ar Menn: 16, 17, 25.

AN TORR-PENN


1 - A-douez an anvioù-bihan-mañ, pehini n'emañ ket da vezañ gant ar re all?

ANNA - NEVEN - LENA - IVI

2 - Dit-te da gavout an arouez a vo da lakaat war-lerc'h ar re-mañ:




3 - Roet ez eus bet d'ur bravigour an tammoù melloù chadenn arc'hant-mañ, dezhañ da ober un dro-vrec'h gante. Dre ma koust 10 lur da droc'hañ hag adsoudañ ur mell, e c'houlenn 40 Lur evit al labour. Ha mat 'vo deoc'h paeañ kement-se?



4 - Ur bleiner eo karget e sammgarr gant houidi bev. Siwazh, war an hent e vez harzet gant ar polis da wiriekaat pouez e sammgarrad. Ur wech erru ar sammgarr war ar bouezerezh e vez ar bleiner emañ ar pouez un disterañ dreist d'an dek tonenn en devez gwir da vezañ. Setu eñ kemer ur c'hrog ha skeiñ ouzh an adkarr da lakaat an houidi da nijal. Daoust ha skañvaet e vo neuze pouez ar sammgarrad?

5 - Aozet e vez un tournamant mell-droad evit Kib Vras Talabao. 64 skipailh a gemer perzh, ha da bep tro e vez tennet kuit ar skipailhoù a goll o match, betek ma chom ur skipailh trec'h hepken, evel ma vez graet evit an holl dournamantoù. Hep jediñ, ha gouest e vlot da lavaret pet match a vo bet c'hoariet?

6 - Cheñchit plas da ziv alumetezenn da ober dek.



7 - Un ergerzher a gerzh 10 Km war-zu ar c'hreisteiz. Treiñ a ra da c'houde ha kerzhet 10 Km war-zu ar reter, treiñ adarre ha kerzhet 10 Km war-zu an norz. En em gavout a ra el lec'h en doa kuitaet er penn kentañ. Lazhañ a ra un arzh. Peseurt liv eo an arzh?



8 - Emañ Marzhin o vont gant e hent, pa en em gav en ur forc'h-hent, ha ne oar ket pe a-gleiz pe a-zehoù ez eo ret dezhañ mont. Eno ez eus daou zen, unan ha ne lavar nemet ar gevier hag egile ha ne lavar nemet ar wirionez. Hogen Marzhin ne oar ket piv eo piv! Gwir en deus da ober ur goulen hepken ouzh unan eus an daou-se. Petra a c'houlenno?

9 - Tri lur e koust ar voutailhad chug-frouezh. Ar chug-frouezh a goust 2 lur muioc'h eget ar voutailh. Pegement e koust ar voutailh?

10 - Tri spier a vez tamallet dezho bezañ treitourion. Hag int ha kaozeal:
Roperzh: "Bernez zo un treitour."
Bernez: "Charlez zo un treitour."
Charlez: "Bernez a lavar gevier."
An dreitourion hepken a lavar gevier. Ma n'eus nemet un treitour en o zouez, piv eo? Ha ma'z eus daou dreitour en o zouez, piv int?

11 - Ma vez toulllet 16 toull gant 8 den en ur ober 32 devezh, en ur ober pegeit e vo toulllet 8 toull heñvel gant 4 den?

12 - Seizh loen en deus Yann, kizhier ha chas. Gant pep ki e vez debret pemp tamm sukr, ha pevar zamm sukr gant pep kash. En holl e vez debret daou damm sukr ha tregont. Pet ki ha pet kash zo gant Yann?





Lunelloù ar Gorriganed

Daniel DOUJET



Spisaomp doc'htu e talv ar ger lunell kement ha maketenn; gouiet a ra an holl petra eo ur vaketenn; bremañ e oui an holl neuze petra eo ul lunell.

D'ar Sadorn 16 ha d'ar Sul 17 a viz Kerzu e oa bet, en Oriant, evit ar wezh kentañ, un diskouezadeg savet get **Klub ar Gorriganed** (*Korrigan Maquettes Club* e galleg). Ha unan zister ne oa ket.

Daet e oa a bep korn a Vreizh hag a vro C'hall ivez tud stummet get al lunelloù. Ha pa lâran "stummet" ez on pell a-walc'h c'hoazh ag ar wirionez: "sot" a rankahen lâret kentoc'h.

Diskouezadeg ken kaer ne oa ket bet gwelet a bell 'zo en Oriant ha n'en doa ket torret kalz steudad an dud en em zalc'h e, digor-bras gete beg ha daoulagad, en-dro d'an taolioù goloet a lunelloù. Kantadoù ha kantadoù a lunelloù a bep seurt.

Kavet e veze sammgirri-pomperion, pesketaerien vreton ar o bag, kirri-nij brezel, herrgirri, soudarded Napoleon e

Waterloo, tankoù, kêriadennoù, tier, trenioù penn kentañ ar c'hantved pe an TGV Atlantel, bagad Lann-Bihoue, loened ragistorel ha kant tra all c'hoazh.

Kaerañ tra da welet a oa ur sirk, en e bezh, koban vras ha kamionoù, tigrad ha leoned en o c'hauidelloù, ur sirk penn-da-benn, goloet getañ un 12 metrad karrez bennak pe ar-dro. Savet eo bet get un den a Blañvour, kêr vihan nes d'an Oriant, hep "trucherezh": n'en deus prenet netra ragaozet, nemet rodoù ar sammgirri, hag al loened. Evit ar peurrest en deus lakaet e ijin da c'hoari hag e vizied da labourat, koad, danvez, plastik ha houarn... ha pasianted. Ur wezh bennak e vo gouestlet ur pennad dezhañ, kement a draoù a zo da lâret diâr e benn.

"Ha n'eo ket echu al labour," a lâre-êñ din, "tri metrad hiroc'h e vo p'em bo graet ar c'hamp e-tal ar sirk get e gara-vanennoù, e girri ha razh..."

Bamet e chomer dirak kement a galon hag a ampartiz.



Sirk an aotrou Alain Le Bronnec-Péron: 12 eurriad evit e sevel bep taol, setu perak n'eo bet diskouezet nemet 9 gwezh betek bremañ. Pleget e vez kement telenn a zo el en ur sirk gwirion.

A-viskoazh emañ bet plijet an dud get al lunelloù, patromoù bihanaet un delwenn pe un dudenn, pe skeudennadur teirmentek ur savadur, ur c'hinkladur, un emgann ha me oar... get ul lezenn diazez boutin d'an holl lunellourion: chom an tostañ ar gwellañ doc'h ar wirionez, a-fed das-koradur ar feurioù, al livioù, an danvezioù, an neuzioù pe ar vuhez a ranker reiñ d'ur gread, pe e vehe pomperion é klask lazhiñ un tangwall pe ur mekanikour é renkiñ ur c'harr. A-c'houde dibenn an eil brezel-bed dreist-holl e weler gouenn al lunellourion é paotaat; e kement kêr a zo pe dost e kaver bremañ ur stal lunelloù d'an nebeutañ. Kluboù niverus zo bet savet ivez, bout a zo anezhe e Breizh e Brest, An Oriant, Ar Releg-Kerc'hor, Montroulez, Kraozon hag en ur bern kêrioù arall sur a-walc'h, ne oant ket daet holl - siwazh! - d'an Oriant.

Daou rummad a ziforc'her en o mesk, ar c'hluuboù amatourion, ar re a bren lunelloù er stalloù, da sevel ha da liviñ er gêr, feal kement hag ar re all d'ar gwir, é labourat rik ha dik, diâr levrioù ha


dielloù evit chom hep fazi (pe fazi an nebeutañ-posubl atav). Ar bazenn gentañ eo ar hent ar vicher.

Ar ur bazenn arall emañ an tadoù-maketenourion da vout lakaet. Labourat a ra ar re-mañ diâr dresoù, dielloù, ha sevel a raont, peurliesañ, pep tra en o unan.

Ur skouer ag an dibab ag an arzourion-se a oa un den a Vontroulez a oa daet getañ d'an Oriant ur 15 sammgarr pomper Alaman, ispisializet, arbennikast eo ar gement-se. Ur skritellig en doa lakaet:

"Savet eo bet an holl lunelloù-mañ diâr reputailhoù plastik, ar-bouez rodoù ar sammgirri."

Reputailhoù adveret hag adstummet, troc'het-didroc'het ha soudet. Pomperion Alaman ne gaver ket er stalloù: dav e vez dezhañ, a p'en dez dober ag unan nevez, kemer tudennoù arall a gaver e gwerzh, o gwiskañ, kemer hanter-gorf unan ha div-har unan arall, get penn un drivet ha divrec'h ur bevarvet bouloimig, d'ober unan doc'h e soñj... Un hir a labour, met ur c'haer a zisoc'h.



Ar bompizion Alaman. Ne vank nemet tan ha dour dezhe. Labour un "lad-lunellour". (Klub lunellourion Montroulez)

Serretoc'h e vez ar c'hluobù tadoù-lunellourion evel ma vez dalc'hmat an tol-padoù gouizieion. Gouizieik a-walc'h ha barrek ar e zavez e rank bout pep unan anezhe, é ouiet ervat e kaver stank, er metoù-se, pismigerion didruez ha lemm o lagad... "ar vaketenn n'he deus ket ur si he deus daou pe dri"...

El levraouegoù o gweler é fuketal, é klask penn da liv gwirion kabellou-rod ar Bugatti Roueel 41 pe da stumm kleze Verkingetoriks.

Kentañ redi eo bout dedennet get an enklask. Eil redi: bout bizied aour ha n'eo ket bizied amanenn.

Trede redi: kaout amzer vak hag ur sal frank a-walc'h er gêr evit degemer an atailher. Un tammig argant a ranker ivez, ker a-walc'h e vez an darbar.

E ti ur maketennour e vez kavet barroù-livañ: ur vlevenn hepken da lod, met unan maltr - 0, 00 pe 000! Barroù ha broustoù a bep ment.

Evit gallet labourat gete e vez dober ag ur werenn-greskiñ troadek ar sichenn ha moudoù dezhi evit derc'hel ar pezhioù bitikañ.

O, SELL! MINI-LUNELL VIHANAET
PENN KOAZHET UR CHORRIG
PÏGME MUNUT, GANT AN AOTROU
JIVARV, A GËRVIHAN! ESPAR!



PFFF! TENVALOCH EO
E LAGAD KLEIZ EGËT
E HINI DEHOÙ!... SED
AZE LABOUR NULL!...

45-90



Pesketaerien vrezon. Taolit mat evezh emañ krog dorn paotr an aros en ur voutailh (goullonderet, evel-just!). A Zouarnenez eo ar vag-se, oc'hpenn ur metrad a hirder dezhi hag ar besketaerien savet diàr poupinelloù "Big Jim" pe "Action Joe!"

Rasklerioù a bep seurt, kizailhoù, tro-c'herioù, peg, pinsetoù, white-spirit ha liv... liv a bodadoigoù evit an amatourion ha liv-dre-eoul (liv taolennoù) evit al lunellourion a vicher.

Mar kaver daou rummad lunellourion e kaver ivez meur a rummad lunelloù.

Al lunell: lunell ur c'harr-nij, pe ur vag, un ti, ur c'hastell, ur c'harr, hag arall.

Ar vignetenn: un dudenn e-unan ar ur sichenn kinklaet.

An diorama: skeudennadur ur gread. Ul labour, un emgann, ur redadeg, ur gwall zarvoud, ur gwell hag arall.

Rummadoù arall a gaver ivez evit pezh a sell ar feurioù; setu ar re a gaver an aliesañ:

1/9vet, 1/12vet, 1/20vet, 1/24vet, 1/35vet, 1/48vet, 1/72vet, 1/350vet hag 1/720vet.

Ar skeul bihanadur-se a zo boutin d'ar muiañ ag ar merkoù bras (Tamiya, Fujimi, Hasegawa, Esci, Verlinden, Jouef, Italiëri,...). Anat a-walc'h eo emañ aesoc'h sevel maketenn an douger kirri-nij ELSENHOMER, dezhañ 332 m a hirder, d'ar skeul 720 evit d'ar skeul 35, nemet e vehec'h kontant da zegemer en ho ti ul lunell dek metrad etre he daou benn!



Haro an aros
Bretanoc'h e varvit.



Ne c'hallan ket jakaat amañ an niver a verkoù lunelloù: degadoù a vehe kavet, er gourmarc'hadoù e weler alies re Heller pe Airfix, mat a-walc'h int evit bugale ha setu tout. Siriusoc'h a zo.

Kazetennoù a vez tu da breniñ ivez, spletus bras d'al lunellgarourion a gav enne kant ha mil tro d'ober gwell, kae-roc'h ha fonnaplac'h o labour. A gazetennoù hag a droioù e vo komzet marse ur wezh arall.

Klvet em eus lâret e vo, a-benn blez, un eil diskouezadeg get ar Gorriganed, un digarez da zont betek an Orient hag un digarez brav.

Daniel DOUJET



Mallgarr gward an impalaer: taolet eo al lunellourion get unwis-koù ar brezelioù napoleonat. Ne vank na boukl na nozell; ur bennoberenn; delioù ar wezenn (a-gleiz) a zo bet didroc'het er paper ha peget unan-ha-unan!



G.S: Arabat eo lâret d'ul lunellour e kavit brav e "c'hoarielloù", ul lunell hag ur c'hoariell a zo daou! Kentañ-penn ne vënt ket prestet d'ar breur'ig bihan.

Pe dudenn a vez dibabet da skouer an aliesañ, pehini a weler ar muiañ? Ver-kingetorika.

Merket em eus ne weler ket kalz a "lunellourezed"... Hag un dachem miret d'ar baotred e vehe?



Bagad Lann Bihoue, kempennet get an aotrou Burel. Soudarded Starlux, ul labour da renkañ e-barzh rummad an amatourion.



Ar gazetenn **Maquettes**, graet mat ha plijus da lenn, he deus kalz a "c'hoarezed": dibab a c'hall al lunellour.

biskoazh kement all !...



● Gweladennerien souezhus en U.R.S.S.

Hervez ar burev-kelaouiñ Tass ez eus bet gwelet e kêr Voronej (480 km e gevred Moskov) gant degadoù a dud, d'ar 27 a viz Gwengolo diwezhañ, un "NiDi" (Nijell Dianavez — U.F.O. e saozneg) o pradañ e-barzh ul liorz-hêr. Tri "den", hag ar pezh a ziskoueze bezañ ur robot, a ziskennas diouzh al lestr, ramzed e oant (etre tri ha pevar metr) hag ur penn bihan-bihan a oa dezho. Ober a rejont ur valeadennig verr a-raok loc'hañ kuit en-dro.

Emañ ar skiantourien o studiañ al louc'hoù manet war-lerc'h ar pezh a c'hellfe bezañ "diavaezidi-douar"...



N'eo ket diavaezidi-douar a-seurt gant hemañ zo bet gwelet a Voronej. Hemañ zo eus ar re a vez graet "rouzardiged" anezho. Kornadoned ez int: ment, 1,30 m war-dro, divre'h moan, treid trefvek ha korf blevek.

● A-bep seurt loened nevez e Breizh.

E-maez da Gonk Kernev ez eus bremañ ur bagad skoaizeien (*Orcinus orca*, sellet ouzh *Talabao* niv.5). Ar bronneged-mor gwenn ha du-se zo deuet da chom dre eno. Pesketaerien ar vro n'int ket gwall laouen. Pep skoaizeg a c'hell debrñ betek 100 kg pesked bemdez.

Nepell alese, e-kichen Kemperle, ez eus bet ganet, evit ar wezh kentañ er bed e-barzh ul liorz-loened, **pantered-erc'h** (*Uncia uncia*). Ar pantered-erc'h, hag a vez o vevañ en Tibet hag en Himalaya, zo loened ral-ral-kaer.

● Ar C'hallaoued o deus loened ivez...

Ur razi ramz zo bet kavet en Abbeville (hanternoz Bro-C'hall) e miz Du 1989. 1 metrad hirder a rae, pouezañ a rae 7 kg, gwenn e oa e vlev ha dent hir-hir begek oa dezhañ.

● "Aeropolis". Emañ Japaniz o vont da sevel e Tokyo ti


brasañ ar bed. 2 km uhelder! 140.000 den (kement ha poblañs kêr Sant Nazer vras) a vo o vevañ ennañ. 300.000 den a yelo bemdez da labourat ennañ (kement ha poblañs Roazhon ha Sant Maloù a-gevret). Ezhomm 'vo eus 16 munutenn evit mont gant ar bignerez betek an estaj diwezhañ. Diazez ar savadur a rae war-dro 5km² (kement ha gorread ur barrez vihan a Vreizh...). Anvet eo bet *Aeropolis* (da lavaret eo "Kêr an Aer").

Betek-henn, brasañ skrabar-oabl ar bed a rae a-boan 400 m uhelder!...

● Lezennoù droch ?

E stad Su-Dakota (U.S.A.) ez eo difennet-groñs gant al lezenn bezañ perc'henn war un evn hag ar c'hazh war un dro. Hag er C'holorado ez eo difennet ober droug d'ar razhed...

TEST : PEHINI EUS AN DAOU BENN-MAÑ EO AN HINI LAOUENNAÑ ?



● Mar kav dit ez eo hini an tu kleiz e tiskoukement-se ez ez out un dehouiad gwir. An dehouidi a labour hanterenn gleiz o empenn buanoc'h eget o hanterenn zehoù (hanterenn gleiz an empenn a ren hanterenn zehoù ar c'horf), da vihanañ evit pezh a sell ouzh traoù ar spered, lezel a reont an trividoù gant an hanterenn zehoù. An dehouidi a sell eta da gentañ ouzhtu kleiz penn an dud, hag amañ o deus gwelet da gentañ lodenn vourc'hoarzhuz penn an tu kleiz.

Ar c'hontrol-bev ez eo evit ar gleizidi evel-just. Daoust hag ezhomm 'm eus da lavaret ez eo heñvel-mik an daou benn?

Savet eo bet an test-mañ gant Julian Jaynes.

GONERI G'KERSAOZON

...Eurêka!

AN TORR-PENN (p. 27)

1 - LENA: ne c'hall ket bezañ lennet a gleiz da zehoù hag a zehoù da gleiz.

2 - 88
Pep arouez zo ur sifr, eus 1 betek 7, kevreet gant e genskeudenn. Da skwer: $7 + 7 = 14$

3 - Ya, dre ma vo 4 mell da droc'hañ: ur mell ouzh an eil tamm, d'e stagañ ouzh an tamm kentañ, ur mell ouzh an trede tamm d'e stagañ ouzh an eil tamm, ha daou vell war ar pevare tamm d'e stagañ ouzh an tamm kentañ hag ouzh an trede d'ober ur dro-vrec'h serr.

4 - Ya, keit ha ma chomo an houiidi en aer! Ne bado ket pell, siwazh...

5 - 63, peogwir ez eus ur skipailh ne-beutoc'h goude pep match!

6 - DEK

7 - Liv ar goap, peogwir en em gav an ergerzher 10 Km er reter d'al lec'h ma oa e penn kentañ:



8 - "Peseurt hent a lavaro da vignon eo ret din kemer?"

Lakaomp e respont an den: "A-zehoù." Mar lavar gevier e responto egile: "A-gleiz", ha gwir e vo peogwir ne lavaro ket gevier.

Mar lavar ar wirionez e responto egile "A-zehoù", ha ret e vo mont a-gleiz ivez peogwir e livo gevier!

9 - Ul lur, peogwir $1 + 2 = 3...$

10 - Mar lavar Charlez ar wirionez ez eo Bernez un treitour.

Ma ne lavar ket Charlez ar wirionez ez eo-eñ un treitour, Bernez n'eo ket anta, ha Roperzh zo unan ivez.

11 - Bez' ez eus un hanter nebeutoc'h a douloù d'ober, met hanter nebeutoc'h a dud zo ivez, setu e vo ret tremen 32 devezh heñvel!

12 - Rannomp 32 dre 5 da gavout an niver a chas: mard eus 6 ki e tebront 30 tamm sukr, ha ne chomo ket peadra da vagañ ur c'hazh. Gant 5 ki e chomo 7 tamm: n'eo ket trawalc'h evit 2 gazh... Gant 4 c'hi e vo debret 20 tamm sukr, ha lezet e vo 12 tamm da vagañ 3 c'hazh. Setu! $4 \text{ c'hi} + 3 \text{ c'hazh} = 7 \text{ loen! Youc'hou!}$

KORN AR FRI-FURCH

Anton a respont d'ho koulennoù

Ur meneziad lizhiri am eus resevet, gant ur bern goulennoù dedennusoc'h an eil re eget ar re all...

Goulenn a ra diganin: "Klevet em eus lavaret e oa ar Stadoù-Unanet e sell da gas sterdeidi war an heol. Ne vefent en arvar da vezañ rostet?"

Tamm ebet mignon ket, faziet out a galz! Mard eo gwir ez eo tomber war an heol e-pad an deiz. E-pad an noz e vez kalz fresko'h!

Ranket em eus tennañ plouz-berr, hag ez eo goulenn ul lenner yaouank eus bro Leon — Gwitevede evit bezañ resis, Goulven F., a zo bet dibabet...




Kement-se zo sklaer evel lagad an naer!


dwi-3

TANGRAM

Setu diskoulmoù TALABAO 16 (piv en deus lavaret "N'eo ket re abred!?!")



Ha setu skeudennoù all:



TALABAO, embannet gant AN HERE, 16 straed Jules Henriot, Kerdrezeg, 29000 KEMPER. Rener ar gazetenn: Alan DIPODE. Kasit gwerzh ho komanant da dTALABAO, 18 straed Berlioz, 29200 BREST. 120 Lur ar bloaz. Komanant skoazell adalek 150 L. Komanant evit ar broioù estren: 150 L. Chekenn da vezañ karget war anv AN HERE. Disklêriet hervez al lezenn c'hall Ebrel 1990. Lezenn c'hall 49-956 ar 16-07-49 a-zivout an embannadurioù evit ar yaouankiz. Lakaet er moull e ti gKloatr, mouller e Sant Tonan 29220 LANDERNE Graet e Breizh © AN HERE 1990